




KENVREURIEZ AR BREZONEG

KATEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

Eizved bloavez.

(45, 46, 47, 48, 49)

NIVERENN 45. TAOLENN.

1°) Eul lizer all da Fanch. (digand eur beleg yaouankoh.)

2°) Rummad ar Bastored:

a) ar salmou. p.1

b) an Aviel p.5

3°) RUMMAD DOKTORED AN ILIZ:

a) Lennadennou. p.10

b) An salmou p.17

c) an Aviel. p.19

4°) An AVE MARIA e brezoneg.

p.23

5°) Damez evid prezegernou:

p.25

a) Piou a stlapo outi ar mên kenta ?

b) Kristenien a ouenn vad.

Taolit evez !

Pedi a reoh start ar re o deus ankounaheet paea o adkoumanant
d'an rummad nevez ar haierou d'en hober, ar henta gwella.

Evid kement tra a sell ouz "Kenvreurezh ar Brezoneg" (Koum. 25 lur), her goulenn
digand:

an Aotrou Job SEITE, Skol an Aod, 29249-GUISSENY

CCP 1733-66 RENNES.

Kavout a reoh azaleg bremañ :

1°) Levr Overenn 35 Lur

2°) Komz Doue en Overenn. Levr T. 30 lur.

3°) Komz Doue en Overenn. Levr A, B, C. Pebhini 20 lur.

4°) Ar briedelez. 8 lur

5°) An Nouenn 8 lur

6°) Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon. 35 lur

7°) Kroaziou Keltieg. (Bleun Brug) 3 lur

8°) Overennou evid an Anaon 8 lur

9°) Overennou en enor d'ar Werhez ... 8 lur

10°) Sakramant ar Vadiziant 8 lur

11°) Enoc'h Ardan . 8. lur .

+ mizou kas.

Troidigeziou aotreet da arnod evid an eskobbi a-berz an Aotrou F. BARRI
eskob Kemper ha Leon.

KEMPER, d'an 2 a viz Ebrel 1977

Visant FAVE, eskob skoazeller.

Souezet awalh on gand ho komzou. Rebechou a rit d'an Iliz ha d'an dud a Iliz; ne skoit ket re galed, gwir eo, netra nemed tintal. Med...

Med, goulenn ma vefe roet muih a blas d'ar brezoneg en ilizou a zo koll amzer, ma ne vez ket goulennet er memes amzer rei muih a blas d'ar brezoneg e darempredou ar vuez a hend all: en oll burevioù a-berz stad: taillou, PTT, kemenadurioù ar houiarnamant pe ar gomun d'an dud. Aze, ger brezoneg ebed morse, ha ne rebarb den! N'eus ket diou lodenn er vuez; ar vuez relijiel hag ar vuez pemdezieg a hend all; o diou ez eont d'en em heulia. Pa zoñjer n'eus ket droad da gas eul lizer gand an adres e brezoneg, taolet e hell beza d'ar blotou ! It da gomz brezoneg e burev pe vurev ar stad, moarvat ne vo ket respontet deoh; komzit avad Saozneg pe Alamaneg hag e vo klasket gouzoud petra 'houlennit.

Ouspenn ma n'oh ket, c'hwi laiked mestr da zivizoud e peseurt yez e vez renet an ofisou en ilizou, pa vez mesk-ha-lesk brezonegerien ha gallegerien, deoh-hwi eo divizoud e peseurt yez e vo badezet ho krouadur pe e vezoh eurejet. Ped a vadiziant pe a eured a vez grêt beb bloaz e brezoneg ? Piou 'zo kaoz ma ne vez ket muih ? N'eo ket ar veleien eo, a drugare Doue e kaver c'hoaz beleien hag a oar brezoneg, beteg pevare avad ?

A hend all, piou a zo da zivizoud e peseurt yez e vez embannet kann-maro war ar gazetennou ? N'eo ket ar veleirn eo. Ped ar bloaz a hellet lenn e brezoneg ? Piou a zo da zivizoud e peseurt yez e vo skrivet war ar bezioù er vered ? It da ober eun dro er berejou

Pa raio al laiked uzaj euz ar brezoneg en digouezou m'eo dezo an disentez, hag aliez o-defe tro da zibab ar brezoneg, neuze e vefent gwelloc'h e tu da houlenn brezoneg en digouezou ma n'eo ket dezo.

Ar brezoneg en ilizou, a du a grenn ganeoh, med da genta, pe da heul, ar brezoneg er mēz euz an ilizou, ar veleien a yelo da heul, goude beza bet ar re genta oh implij ar brezoneg hag ar re ziweza o stourm ouz ar mor galleg a venn or beuzi.

N'eo ket da ober deoh fallgaloni e skrivan, er hontrol eo ! Pa hounezo ar brezoneg tachenn er mēz euz an ilizou e tevio ivez abred da hounid tachenn en ilizou. Labour a zo da ober avad dreist-oll e-touez ar yaouankizou, amzer da zond ar vro.

Ne garfen ket e vefe bet trenk va lizer !

a-unan ganeoh ha stard evid ar brezoneg.

Ar beleg yaouankoh.

OVERENNOU EVID AR ZENT HAG AR ZENTEZED.

RUMMAD AR BASTORED.

AR SALMOU.

I-SALM 88/2-3;4-5,27,29:

Diskan; Madeleziou Doue a ganin da viken
a rumm da rumm eh embannin
pegen mad eo bet evidon.

2-Madeleziou an Aotrou Doue a ganin-me da viken;
a rumm da rumm eh embannin pegen feal oh d'ho kér.

3-Hen lavaret am-eus: da viken eo diazezet ho madelez,
war an neñvou eo harpet stard ho fealded.

4-Emgleo am-eus grêt gand an den dibabet ganin,
touet am-eus le da Zavid, va servicher:

5-"Da viken e virin da lignez heb diskar,
ha da gador roue a zalhin en he flom a rumm da rumm."

27-Eñ a zavo e vouez davedon: "Va zad oh-c'hwi,
va Doue, ha roh va zilvidigez."

29-Da virviken e virin dezañ va madelez,
ha didorr e chomo va emgleo gantañ.

II-SALM 105/ 19-20, 21-22;23:

Diskan: Bezit soñj áhanon, Aotrou Doue,
pa vezoh troet mad e kenver ho pobl.

19-Greet ho-deus eul leue aour war menez Horeb,
ha stouet o-deus dirag an delwenn

20- Troket o-deus o gloar
evid skedenn eun ejenn, eun debrer-yeot.

21-Dizoñjet o-deus Doue o Zalver
an hini e-noa greet traou braz en Ejipt.

22-Ha greet burzudou e Bro-Kam
ha traou spontuz e kichen ar Mor-Ruz.

23-Divizet e-noa o distruja:
med Moizez, an hini dibabet gantañ,
a yeas d'e ziARBENN,
hag e torras e gounnar.

III-SALM 15/ 1-2aha 5, 7-8,11:

Diskan: Tridal a ra va halon e Doue
ha joa 'zo em ene.

1-Va mirit, Aotrou Doue,
en ho kichen, e kavan repu.

2a-Lavared a ran d'an Aotrou: "C'hwil eo va mestr"

5-C'hwil va lod ha va halirad;
etre ho taouarn ema va flanedenn.

7-Bennoz d'an Aotrou e-neus roet kuzul din;
dre va housk zoken e kendalh d'am hentelia.

8-Heb ehan e talhan an Aotrou dirazo,
p'ema en tu dehou din, ne gouezin ket.

11-Ober a reoh din anaoud hent ar vuez,
dirazoh ar galon 'zo leun-barr a levenez,
en ho kichen ez eus eürusted peurbaduz.

IV-SALM 22/ 1-3a; 3b-4; 5-6:

Diskan; Doue eo va fastor,
ne vanko din netra;
rag war ar peuri druz,
am has da ziskuiza.

1-An Aotrou eo va fastor, n'am-eus diouer a netra.

2-War ar prajou geot tener, e ra din gourvez;
daved doureier an diskuz e kas ahanon,
3a ha nerz fresk a ro d'am ene.

3b-Va heñcha 'ra dre ar gwennejennou surra, evid enor e ano.

4-Ha pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou;
n'am-eus aon rag droug ebed, rag c'hwil 'zo ganin.
Ho-pern-baz ha ho kwalenn am laka dineh.

5-Evidon e lakit an daol, dirag sellou va enebourien;
an eoul c'hwéz-vad a skuillit war va fenn,
ha va halir a zo leun-barr.

6-Eürusted gand ho madelez a vo va lod, bemdez 'hed va buez;
digemer a gavin e ti an Aotrou, epad hir amzer.

V-SALM 39/ 2,3-4; 7-8a; 8b-10:

Diskan; Setu me o tond, Aotrou Doue,
evid ober ho polontez.

2-E Doue em-eus, lakit va fiziañs
troet eo warzu ennon
ha selaouet e-neus va hlemmadenn.

- 3-D'am zenna euz ar puñs,
euz ar vouillenn eo deuet,
lakeet e-neus din va zreid war ar haled,
starteet e-neus va herzed.
- 4-War va muzellou eur hantig nevez
eur veuleudi d'on Doue.
- 7-Ne blije ket deoh na zakrifis, na provadenn,
med va diskouarn ho-peus digoret;
ne houlenneh na zakrifis peurlosket, na zakrifis evid ar pehed.
- 8a-Neuze am-eus lavaret: "Setu me o tond"
- 8b-Skrivet eo al levr diwar va fenn:
- 9- ober ho polontez, va Doue, setu va dudi;
ho lezenn 'zo e goueled va halon.
- 10-Ar helou mad euz ho perz a embannin e bodadeg vraz an dud,
ne zalhin ket kloz va muzellou: Aotrou Doue; her gouzoud a rit.

VI-SALM 95: 1-2a; 2b-3; 7-8a; 9-10 ac)

Diskan; Grit brud, e-touez an oll boblou
d'an traou kaer 'neus greet Doue.

- 1-Sapit d'an Aotrou Doue eur han nevez,
meulit an Aotrou dre bevar horn ar bed.
- 2a-Roit meuleudi d'an Aotrou ha mil bennoz d'e ano.
- 2b-Bemdez; roit da anaoud e zilvidigez;
grit brud d'e hloar e-touez broadou an douar,
d'an oll boblou displegit e vuzudou.
- 7-Dougite 'ta broadou a beb gouenn, dougite d'an Aotrou gloar ha galloud;
- 8a-Dougite d'an Aotrou an enor dleet d'e ano.
- 9-Deuit, gand ho kwiskamañchou sakr, d'adori an Aotrou;
krenit dirazañ gand doujañs, tud an douar a-bez.
- 10-It da lavaroud d'ar broadou: Roue eo an Aotrou Doue !
gouarn a ra an oll boblou hervez ar justiz.

VII- SALM 109/ 1,2,3,4:

Diskan: Beleg out da viken
Krist hag Aotrou !

- 1-An Aotrou-se e-neus lavaret d'am Aotrou:
-"Azez en tu dehou din
da enebourien a lakin da skabell dindan da dreid."
- 2-Euz a Zion eh astenno an Aotrou
da walenn halloudus a roue;
bez mestr beteg e-kreiz da enebourien.
- 3-Garit ema ar galloud a roue, da zeiz da hinivelez;
e-kreiz splannder ar zantelez da houlou-deiz,
evel eur hlizenn
em-eus roet buez dit.

4-An Aotrou e-neus touet ha ne zeuio ket war e hêr
Beleg out da viken, e-doare Melkisedek.

VIII-SALM 116/ 1-2:

Diskan: It dre ar béd
da brezeg an Aviel.

1-Oll boblou ar béd, meulit an Aotrou,
meulit e ano, oll vroiou ar béd.

2-Stard eo e garantez evidom
hag e wirionez a bad da viken.

AN AVIEL.I- MAZE 9/36-39:

Alleluia, Alleluia. Yann 10,14
 Me, ar pastor mad, a anavez va deñved,
 ha va deñved am anavez. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. Gweled levr A.p.76

Ia-MAZE 16/13-19:

Alleluia, Alleluia. Mark 1./17
 Deuet eo betek ennoh rouantelezh Doue.
 Kredit er helou mad. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. Gweled levr A.p.94

II-MAZE/23/8-12:

Alleluia, Alleluia. Maze 23/9b-10b
 N'ho-peus nemed eun Tad, an hini a zo en neñv
 n'ho-peus nemed eun doktor: ar Hrist. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE:

8-Na dit ket da gemered an ano a rabbi(mestr),
 rag breudeur ez oh oll,
 ha n'ho-peus nemed eur mestr evid ho keleñn.

9-Na roit da zen war an douar an ano a dad,
 rag n'ho-peus nemed eun tad
 an hini a zo en neñvou.

10-Na rit ket kennebeud rei deoh a ano a doktor
 rag n'ho-peus nemed eun doktor: ar Hrist.

11-An hini brasa en ho touez a vo ho serc'her.

12-Rag an neb piou bennag en em uhella a vo izelleet
 hag an neb piou bennag en em izella a vo uhelleet.

III-MAZE 28/16-20:

Alleluia Alleluia Maze 19a,20b
 Euz an oll vroadou, grit diskibien din.
 Ganeoh emañ betek fin ar bed. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. Gweled levr B p.43

IV-MARK 1/14-20:

Alleluia Alleluia
 "deuit d'am heul, ma ray ahanoh
 pesketerien tud. Alleluia.

Mark 1/17

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK:

14-Goude ma oa bet lakeet Yann-Vadezour er prizon,
 Jezuz a zeuas da Vro-Halile
 da embann kelou mad rouantelez Doue,

15-en eur lavared: deuet eo an amzer d'e boent,
 tost em rouantelez Doue.
 bezit keuz d'ho pehejou
 ha kredit er helou mad.

16-D tremen war ribl mor Galile e welas Simon
 hag e vreur Andre o taoler o rouejou er mor,
 rag pesketerien e oant.

17-Jezuz a lavaras dezo:
 -"deuit d'am heul, ma a ray ahanoh pesketerien-tud."

18-Kerkent e tilezont o rouejou evid mond d'e heul.

19-Eun tammig pelloh, Jezuz a welas Jakez, mab da Zebede,
 hag e vreur Yann, int-i ivez en eur vag,
 o kempenn o rouejou.

20-O gelver a reas dioustu.
 Neuze, o tilezel o zad gand e vevelien er vag
 ez ajont d'e heul.

V-MARK 16/15-20:

Alleluia Allelui a
 Euz an oll vroadou grit diskibien din
 Ganeoh emañ betek fin ar bed. Alleluia.

Mz. 28:19a-20

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK:

Gweled levr B p.39

VI- LUK 5/1-11:

Alleluia Alleluia
 Deuit d'am heul, me ray ahanoh
 pesketerien tud. Alleluia.

Mk 1/17

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ:

- 1-Eun devez, eñket gand engroez an dud
en em starde en-dro dezañ evid kleved komzou Doue,
Jezuz a oa war ribl lenn Jenezared.
- 2-Gweled a ra diou vag, diskennet ar besketerien anezo
evid gwalhi o rouejou.
- 3-O veza pignet en unan, a oa bag Simon,
e houlenn digantañ pellaad eun nebeudig diouz an douar;
azezet er vag, e krog da brezeg d'ar bobl alese.
- 4-Echu gantañ da brezeg, Jezuz a lavar sa Zimon:
"Sko war an domvor, ha taolit ho rouejou da besketa."
- 5-Ha Simon a respont dezañ: "Mestr, goude beza poaniet
penn-da-benn an noz, n'on-eus paket netra;
koulskoude, pa lavarit hen ober, e taolin va rouejou."
- 6-Kerkent ha m'o-deus grêt an taol, e pakont kement a besked,
ma'z eo dare ar rouejou da regi
- 7-Ober a reont sin d'o henseurtes euz ar vag all da zond d'o zikour.
Dond a reont, hag e karger an diou vag,
ken leun m'emaint war-néz beza gouledet.
- 8-O weled kement-se, Simon-Pèr en em strink ouz daoulin Jezuz,
en eur lavared: "Aotrou, pellait diouzin,
rag me n'on nemed eun dén peher."
- 9-Evid gwir, kroget oa ar spont ennañ, hag ar re oll a oa gantañ,
o weled ar besketeres vuzuduz o-doa grêt.
- 10-Ken spontet all-oa Jakez ha Yann, mibien Zebede,
kompagnuned da Zimon.
Med Jezuz a lavar da Zimon: "Na gemer ket aon !
hiviziken e vi pesketaer tud."
- 11-Neuze, goude beza digaset o bagou d'an douar,
ha dilezet peb tra,
ez int eet da heul Jezuz.

VII-Luk. 10/1-9: Alleluia Alleluia
Spered an Aotrou a zo warnon
rag m'en-eus sakret ahanon
evid mond da brezeg ar Helou mad Alleluia.

Luk. 4/18-19

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ. (Gweled Levr C.P.7)

VIII- LUK 22/24-30:

Alleluia Alleluia
Bremañ e roan deoh an ano a vignon
rag kement am-eus klavet gand va zad
am-eus roet deoh da anaoud. Alleluia.

Yann 15/15b

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ. (Gweled Levr C . P.21)

IX-YANN 10/11-16:

Alleluia Alleluia
 Me eo ar pastor mad,
 anaoud a ran va re,
 ha va re ivez am anavez. Alleluia.

Yann 10/14

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

Kement-mañ a l avare Jezuz d'ar Juzevien:

11-Me eo ar pastor mad. Ar pastor mad a ro e vuez evid e zeñved

12-An hini n'eo nemed mevel, ha n'eo ket eñ ar pastor,
 pa n'eo ket an deñved e re dezañ,

a jom dizober da zelled ouz ar bleiz o tond,

a zilez an deñved hag a gemer an teh;

hag ar bleiz a daol e skil; ou war an deñved hag o skign a-beb tu

13-Ar mevel a gemer an teh, peogwir n'eo nemed mevel
 ha n'eo ket chalet gand an deñved.

14-Me eo ar pastor mad; anaoud a ran va re,
 ha va re ivez am anavez,

15-evel ma anavez an Tad ahanon, ha me ivez a anavez an Tad;
 ha va buez a roan ivez evid va deñved.

16-Deñved all am-eus o'hoaz, ha n'emaint ket er park-deñved-mañ:
 ar re-ze ivez am-eus da zigas davedon: kleved a raint va mouez
 ha ne vo nemed eur bagad deñved, hag eur pastor hebkén.

X-YANN 15/ 0 9-17:

Alleluia Alleluia
 Bremañ e roan dech an ano a vignon,
 rag kement am-eus klevet gand va zad
 am-eus roet dech da anaoud. Alleluia.

Yann 15/15b

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN.

Gweled levr B.p.38

XI-YANN 21/ 15-17:

Alleluia Alleluia
 Me eo ar pastor mad,
 Anaoud a ran va deñved,
 ha va deñved am anavez. Alleluia.

Yann 10/14

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

Jezuz, savet da veo euz ar bez, a zo deuet d'en em ziskouez d'an Ebestel war ribl lern Jenezared;

15-Goude o fred, e lavar Jezuz da Zimon Pêr:

"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon muioc'h eget ar re-mañ?"

Respont a ra: "Ya, Aotrou, gouzoud a rit am-eus karantez evidoh."

Jezuz a lavar neuze: "Bez pastor va deñvedigou."

16-Evid an eil gwech e houlenn outañ:

"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?"

Respont a ra: "Ya, Aotrou, c'hwi 'oar am-eus karantez evidoh."

hag e lavar Jezuz dezañ: "Bez pastor va deñved."

17-Evid an drede gwech e houlenn outañ:

"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?"

Pêr a zav glahar ennañ, ablamour ma houlenn outañ evid an drede gwech: "Ha kared a rez ahanon?"

ha respont a ra dezañ: "Aotrou, c'hwi 'anavez peb tra, c'hwi 'oar am-eus karantez evidoh."

Jezuz a lavar dezañ: "Bez pastor va deñved."

III- RUMMAD DOKTORED AN ILIZ.

LENNADENNOU,

(Kemer a heller ivez al lennadennou merket pelloù evid ar zent hag ar zentezed.)

LENNADENN GENTA(er mêz euz an amzer Fask.)

I- I Roua. 3/11-14:

Doue a ro furnez d'ar roue Salomon.

Lennadenn euz levr kenta ar Rouaned:

11-Doue a lavaras da Zalomon:

"n'az-peus ket goulennet buez hir evidout,
na pinvidigez na maro da enebourien,
ha peogwir az-peus goulennet
skiant vad evid gouarn gand furnez
setu ma roan dit da houlenn.

12-Rei a ran dit eur spered fur ha lemm
evel m'e-neus bet dén ebed en da raog
ha n'e-no den war da lerh."

13-Rei a ran dit zoken ar pezh n'az-peus ket goulennet:
ar binvidigez hag ar hloar,
en doare ma ne vo roue ebed par dit,
hed-a-hed da vuez.

14-Ouspenn, ma heuliez va henchou,
en eur vired va lezennou ha va gourhemennou
evel m'e-neus grêt David da dad,
e roin dit hir vuez.

SALM 36/ 3-4, 5-6, 30-31.

(Gweled pelloù) p.17

2-AR FURNEZ...7/7-10, 15-16:

Tenzoriou ar Furnez.

Lennadenn euz levr ar Furnez.

7-Pedet am-eus, ha skiant 'zo bet roet din;
aspedet am-eus, hag ar spered a'furnez a zo deuet ennon.

8-Ar furnez am-eus prizet muioù eged rouantelezh ha kador-roue,
ha lakeet am-eus em spered n'eo ar binvidigez netra en he hichen.

9-Ne welan mên prisiuz ebed da lakaad e skoaz ganti;
 oll dour ar bed, n'eo enke hichen nemed eun nebeudig trêz,
 hag an arhant n'e-no ket dirazi muioh a briz eged ar fank.

10-Dreist ar yehed hag ar gened eo bet plijet d'an halon;
 kentoh eged sklerijenn an heol,
 am-eus bet e'hoant d'he haoud
 hi, ha ne varv ket ar sked anezi.

15-Plijet gand Doue rei din komz gand skiant,
 ha maga menoztjou din euz an donezonou resevet;
 rag En eo heñcher ar furnez
 ha bleiner an dud fur.

16-Delher a ra dindan e veli
 ni on-unan hag or homzou
 peb gouiziegez ha peb ampartiz.

SALM 18/8,9,10,11 (Gweled pelloh) p.17

3- SIRAH 15/ 1-6:

Mignon ar Furnez.

Lennadenn euz levr Sirah:

1-An hini a zouj an Aotrou a vev hervez e zoujañs
 an hini a zalh al lezenn a dizeo ar furnez.

2-Dond a ray en arbenn dezañ evel eur vamm;
 evel eur wreg yaouank e tigemero anezañ,

3-e vago anezañ euz bara ar skiant,
 e roio dezañ da eva dour ar furnez,

4-warni eh en em harpo, ha ne wano ket,
 outi eh en em stago, ha n'e-no ket kerse na mez.

5-E zevel a ray a-uz d'e gerent,
 e kreiz an dud bodet e tigor dezañ e henou.

6-Joa ha kurunenn a levenez a gavo,
 brud peurbaduz a vo e lod.

SALM 118/ 9,10,11,12,13,14. (Gweled pelloh)p.18

4- SIRAH 39/ 8-14:

Karget e vo gand ar spered a skiant.

Lennadenn euz levr Sirah:

8-An hini a glask ar furnez
 a lakay da skedi ar gelennadurez e-no resevet,
 ha mired lezenn an Aotrou a vo e lorch.

- 9-Meulet e vo e skiant gand kalz a dud,
biken ne vo ankounaheet,
an envor anezañ ne daio ket da goll,
hag e ano a jano beo a rumm da rumm.
- 10-Ano a vo euz e furnez gand ar broadou,
hag an dud bodet a gano e veuleudi.
- 11-Ma vev hir amzer, e lezo war e lerh
eun ano brudetoh eged mil all,
ha ma varv(abred) e-no bet awalh.
- 12-Goude beza prederiet ez an c'hoaz da gaozeal,
rag leun on, evel al loar en he harn;
- 13- Selaouit ahanon bugale ar zent !
ha kreskit evel ar rozenn a zav e-kichen dour-red.
- 14-Taolit c'houez vad evel an ezans,
deuit da vleunia evel al lilienn,
savit ho mouez, kanit asamblez,
bennigit an Aotrou en e oll oberou.

SALM 36/ 3-4, 5-6, 30-31:

(Gweled pelloh) p.17

LENNADENN GENTA (epad an amzer fask)

1-Oberou 2/14a, 22-24, 32-36:

Jezuz a zo savet a varo da veo.; test om da gementse.

Lennadenn euz levr oberou an Ebestel:

- 14-Pèr neuze, an Ebestel all endro dezant, gand eur vouez kreñv a lavar:
- 22-"Gwazed Izrael, selaouit ar homzu-mañ: Jezuz a Nazared,
an hini e-neus Doue roet-deoh da anaoud, dre ar miraklou,
ar burzudou hag ar sinou e-neus grêt en ho touez,
evel ma ouezit mad.
- 23-An den-se hag a oa bet gwerzet, hervez ar pezh
a oa bet divizet dres gand Doue
hag hervez ar pezh a ouie mad an Aotrou Doue en araog,
c'hwi ho-peus tapet krog ennañ hag e lakeet d'ar maro,
en eur ober d'ar bayaned e staga ouz ar groaz.
- 24-Med Doue e-neus e zavet da veo, o lakaad eun termen da boaniou ar maro;
n'helle ket chom din-dan galloud ar maro,
- 32-Ar Jezuz-se, Doue e-neus e zazorhet,
oll ez om test a gement-se.

33-Savet uhel gand dorn Doue
e-neus eta resevet digand an Tad
ar Spered Santel prometet
hag e-neus strevet anezañ
evel ma welit ha ma klevit, c'hwi hoh unan.

34-David ha n'eo ket pignet d'an neñvou
a lavar koulskoude e-unan.
'An Aotrou e-neus lavaret d'an Aotrou:
azez en tu dehou din,

35-ken n'am-bo greet euz da enebourien,
eur skabel dindan da dreid.

36-Tud Israel, red eo deoh gouzoud mad kement-mañ:
Jezuz ho-peus staget euz ar groaz,
Doue e-neus greet anezañ an Aotrou hag ar Hrist.

2-Oberou an Ebestel 13/ 26-33:

Testeni da Jezuz maro ha dazorhet.

Lennadenn euz Oberou an Ebestel:

26-Va breudeur, ha pa vefeh bugale euz gouenn Abraham;
pe tud a zoujañs Doue,
deoh an hini eo bet kaset ar gomz-mañ a zilvidigez.

27-Tud Jezuzaleñ hag ar re'zo en o fenn
o-deus dianavezet Jezuz,
en eur gondaoni anezañ o-deus digaset da wir
komzou ar brofeted a vez lennet beb Sabad.

28-Heb beza kavet ennañ abeg a varo ebed,
o-deus goulennet digand Pilat e lakaad d'ar maro.

29-ha p'o-devoa sevenet kement a oa skrivet diwar e benn
o-deus diskennet anezañ euz ar hoad
hag e lakeet en eur bez.

30-Med Doue e-neus e zavet a douez ar re varo.

31-En em ziskouezet e-neus, epad meur a zvez
d'ar re a oa pignet gantañ euz Galilea da Jeruzalem
ar re-ze hag a zo bremañ
testou dezañ dirag ar bobl.

32-Ni ivez a zigas deoh ar heñlou mad-se;
ar bromesa greet d'on tadou,

33-Doue e-neus he digaset da wir
evidom-ni o bugale
p'e-neus adsavet Jezuz a varo da veo
evel m'eo skrivet en eil salm:
"va mab ez out-te, me hirio am-eus da engehentet."

3- I Kort. 1/18-25:

Ferne Doue ha follentez an dud.

Lennadenn euz lizer kenta Sant Paol da gristenien Korint.

(gweled overenn ar bastored. K.43 p. 125

4- I Kor. 2/1-10:

Furnez mister Mab Doue.

hennaden euz lizer Kenta Sant Paol da gristenien Korint:

1-Va breudeur, p'on deuet davedoh, n'on ket deuet da rei deoh
da anaoud mister Doue,
gand pouez komzou helavar ha gouizieg.

2-En ho touez, n'em-eus hoanteet anaoud hini all ebed,
nemed Jezuz-Krist,
bet staget ouz ar groaz.

3-Disterig, aonig hag en eur grena,
on degouezet en ho touez.

4-Va homzou, va doare da brezeg n'oa enno netra
euz prezegennoù touelluz ar ouiziegezh,

5-Med spered ha nerz Doue eo a bare enno,
evid ma ve ho feiz diazezet,
nann war skiant an dud, med war nerz Doue hebken.

6-Va breudeur, euz Furnez eo e vez ano ganeom,
pa gomzom dirag tud deuet en o feiz.
Med, n'eo ket avad euz furnez ar bed,
nag euz hini ar re a ra o mistri war ar bed,
hag a zo gouestlet da vond da goll.

7-Komz a reom, er hontrol, euz eur furnez
misteriuz ha dalhet kuzet
pourchaset gantañ araog ar hantvejou
evid rei deom or hloar.

8-Eur furnez eo ha n'eo ket anavezet
gand hini ebed euz mistri ar bed-mañ;
rag m'o-defe anavezet anezi,
morse n'o-defe staget ouz ar groaz
an Doue leun a hloar.

9-Hervez ar Skritur, ar pezh e-neus morse an den gwelet,
gand e zaoulagad,
ne klevet gand e ziskouarn,
ar pezh n'eo ket bet diwanet en e galon,
kement-se a zo bet pourchaset gand Doue,
evid ar re o-deus karantez evitañ.

10-Deom-ni eo e-neus Doue roet anezho da anaoud dre ar Spered
rag ar Spered a wel peb tra en e greiz,
beteg donderiou Doue Zoken.

5- I Kor. 2/10b-16:

Kelenn hervez ar Spered.

Lennadern euz lizer kenta Sant Paol da gristenien Korint:

- 10b-Va breudeur, ar Spered a wel peb tra en e ziabarz,
donderiou Doue zoken.
- 11-Piou, euz a douez an dud, a anavez ar pezh a zo en dén,
nemed spered an den a zo en den e-unan ?
Evelse ivez den ne oar petra'zo e Doue nemed Spered Doue.
- 12-Evidom-ni ar spered on-eus resevet n'eo ket hini ar bed
med ar spered a zeu euz a Zoue,
evid ma'h anavezfem an donezonou roet deom gand Doue.
- 13-Hag eh embannom kement-se
gand komzou desket n'eo ket diwar furnez an den,
med diwar furnez ar spered
hag e tisplegom en eun doare speredel
ar pezh a zeu euz ar spered.
- 14-An den, gand e nerz e-unan nemetken,
n'hell ket reseo donezonou spered Doue;
evitañ n'eus aze nemed follentez,
ha n'hell ket o anaoud
rag dre ar spered eo e teuer d'o intent.
- 15-Med an den speredel a varn peb tra,
hag eñ n'eo barnet gand dén.
- 16-Rag piou e-neus anavezet menoz Doue .?
Piou a roio kentelioù dezpañ ?
Med, ni eo on-eus menoz Doue.

6- EFEZ 3/8-12:

Mister Doue n'eus harz ebed dezpañ.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da gristenien Efez:

- 8-Va breudeur, me, an disterra euz an dud fidel,
a zo bet roet din gras ha karg da brezeg etouez ar bayaned
ar pinvidigeziou dreist-muzull a zo en Aotrou Krist,
- 9-ha da daoler sklerijenn war ar menez misterius a zo a-viskoaz;
med kuzet beteg-henn, e spered Doue, krouer an oll draou.
- 10-Evelse, an Elez o-unan hag oll sperejou an neñvou
a zo deuet bremañ da houzoud, o weled an Iliz,
pegen liez doare a zo da furnez Doue.
- 11-A viskoaz e noa Doue divizet ober kement-se,
ha digaset e-neus e venoz da wir en Or Zalver Jezuz Krist.
- 12-A drugarez d'ar Zalver ha dre or feiz ennañ,
ez om hardiz awalh evid tostaad ouz Doue gand fizians.

7-EFEZ 4/ 1-7; 11-13:

Eur feiz hebken, eur vadiziant hebken.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da gristenien Efez. (Gweled K.43 p.127)

8-II Tim. 1/ 13-14, 2/ 1-3:

Dalhom mad d'ar gelennadurez a zo bet roet deom.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da Dimote:

(Gweled overenn ar bastored. Kaier 43. P.128)

9-II Tim. 4/ 1-5:

Poagn da gas war a raog prezegérez an Aviel,

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da Dimote.

(Gweled overenn ar Bastored. Kaier 43 P. 129)

SALMOU.

1-SALM 18/ 8,9,10,11:

Diskan: Eun Doue hebkén a adori
Ha dreist peb tra oll a gari.

pe: Setu aze gourhemennou Doue,
Lezenn a garante, 'vid silvidigez an ene.

- 8-Kezenn an Aotrou Doue 'zo peurvad, eur vammenn a vuez eo;
Kelennadurez an Aotrou 'zo difazi. furnez a ro d'an den dizesk.
- 9-Gourhemennou an Aotrou 'zo reiz, levenez a roont d'ar galon,
Bolontez an Aotrou 'zo splann, sklerijenn a ro d'an daoulagad.
- 10-Doujañs an Aotrou 'zo santel, da viken e pado;
Menozioù an Aotrou 'zo gwirionez, reiz int penn-da-benn.
- 11-Plijuz int dreist an aour, dreist eur bern aour digermesk;
ha c'hweg int dreist ar mël, dreist ar mël a zivér euz ar
ruskennou.

2-SALM 36/ 3-4; 5-6; 30-31:

Diskan; Ennoch, Aotrou, e lakan va fiziañs.

- 3-Laka da fiziañs en Aotrou ha gra ar mad,
Chom er vro ha debr euz ar frouez a daol.
- 4-Laka da joa en Aotrou,
hag e roio dit ar pezh a hoanta da galon.
- 5-Laka etre daouarn an Aotrou da blanedenn,
Laka da fiziañs ennañ, Eñ a zeveno!
- 6-Lakaad a ray da justis da skedi evel ar zav-heol
hag ar gwir eo da hini evel an heol d'ar hreiteiz!
- 30-~~Ar~~uzellou an den just a embann ar furnez
hag e deod a lavar ar wirionez.
- 31-Lezenn e Zoue a zo en e galon
ha ne horjell ket e gammedou.

3-SALM 118/ 9-10, 11-12, 13-14:

Diskan; Deskit din, Aotrou,
bale war ho roudou.

9-An den en e yaouankiz, penaoz delher glan e hent ?
en eur vired da lavarjou.

10-A greiz va halon, eo te am-eus klasket,
N'am lez ket da drei diwar da hourhemennou.

11-Miret am-eus em halon da hourhemennou,
kuit da behi ouzit !

12-Ra vezi benniget Aotrou
ro din da anaoud da hourhemennou !

13-Dibunet am-eus war va mizellou
da oll divizou .

14- Levenez am-eus kavet o heulia da hourhemennou
evel ma ve em herz ar brava tenzoriou.

DOKTORED.

AN AVIEL.1-MAZE 5/13-19:

Alleluia Alleluia !

(Mz 5/16)

Evelse ho sklerijenn a skedo dirag an dud ,
 hag o weled ar vad a rit,
 ar re-mañ a rento gloar d'ho Tad a zo en neñvou
 Alleluia.

Aviel Jezuz Krist Hervez Sant VAZE:

O veza m'oa bodet e ziskibien endro dezañ, Jezuz a lavar d'ezo:

13- C'hwi a zo hollen an douar:
 med ma teu an hollen da goll e vlaz,
 gand petra e vo roet dezañ e zaour ?
 N'eo mad mui da netra, nemed da veza
 taolet er mēz ha breset gand an treid.

14-C'hwi a zo sklerijenn ar hed;
 Eur gêr savet war lein eur menez ne hell ket beza kuzet.

15-Ne vez ket enaouet eur goulou evid hen lakaad
 dindan eur boezell.
 Lakeet e vez evel eur hantolor
 hag e sked neuze, evid ma roio sklerijenn
 d'ar re oll a zo en ti.

16-Evelse, ho sklerijenn a skedo dirag an dud
 hag, o weled ar vad a rit,
 ar re-mañ a rento gloar d'ho Tad a zo en Neñv.

17- N'it ket da gredi, e ven deuet da ziskar al Lezenn hag ar Brofeted,
 n'on ket deuet d'o diskar, med d'o feurechui.

18-Rag e gwirionez, m'hel lavar deoh,
 keid ha ma pado an neñv hag an douar,
 na pig na lizerenn ne vo lammet kuit euz al lezenn,
 ken na vo sevenet peb tra.

19-An neb a dorro unan euz an disterra gourhemennou,
 hag a zougo ar re all da oher kement all,
 a vo lakeet e-touez ar re zisterra e rouantelez an Neñv,
 med an hini a heuill anezo hag a zoug ar re all d'o heulia,
 hennez a vo lakeet uhel e rouantelez an Neñv.

1a-MAZE .7/21-29:

Alleluia Alleluia !

(Yn. 6/64b ha 69b)

Spered ha buez eo komzou an Aotrou,
ganeoh ema komzou ar vuez peurbaduz !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vazé:

21-N'eo ket o lavared din: "Aotrou, Aotrou, ez aer e Rouanrelez an Neñv,
med oh ober bolontez va Zad a zo en Neñv.

22-Kalz a lavaro din; en deiz-se: "Aotrou, Aotrou,
daoust ha n'eo ket en da ano eo on-eus komzet;
en da ano on-eus argaset an droug-spered,
en da ano on-eus greet burzudou ?

23-Neuze e respontin dezo: "N'em-eus biskoaz hoh anavezet,
it pell diouzin, c'hwi hag a ra droug.

24-Evelse, an hini a zelaou va homzou, hag a heuill anezo,
a zo heñvel ouz eun den a skiant vad, savet ti gantañ war ar garreg

25- ar glao a zo kouezet, an dour-beuz a zo dirollet,
an aveliou o-deus c'hwezet gand kounnar war an ti;
n'eo ket kouezet en e boull, diazezet oa war ar roh.

26-Med an den a zelaou va homzou, ha ne zent ket outo,
a zo heñvel ouz eun den diskiant e-neus savet e di war an trêz:
ar glao a zo kouezet, eur pill dour 'zo deuet,
an aveliou 'zo savet hag o-deus c'hwezet war an ti.

27-Koueza 'ra en e boull hag an den a goll peb tra.

28-Pa n'oa Jezuz echuet ar henteliou-se
e chomas an dud estlammet gand e gelennadurez.

29-Rag o helenn a ree evel eun den beli dezant
ha n'eo ket evel ar skribed.

1b- MAZE 13/ 47-52:

Alleluia Alleluia

(d.ob.15/14b)

Digorit Aotrou or halor

ma vezim evezieg ouz komzou Doue. Alleluia.

Aviel Jezuz Krist hervez sant Vaze.

(Gweled levr A.p.88)

2-MAZE 23/8-12:

alleluia Alleluia !

(Mz. 23/ 9a-10b)

N'ho-peus nemed eun Tad

an hini a zo en neñvou;

n'ho-peus nemed eun doktor: ar Hrist, Alleluia!

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze:

Jezuz a lavar d'ar skribed:

8-C'hwari, na dit ket da rei d'ar skribed an ano a rabbi (mestr)
rag breudeur ez oh oll ha n'ho-peus
nemed eur mestr evid ho keleenn.

9-Na roit da zen war an douar an ano a dad,
rag n'ho-peus nemed eun tad, an hini a zo en Neñvou.

10-Na rit ket kenneubeud rei deoh an ano a zoktor,
rag n'ho-peus nemed eun doktor: ar Hrist !

11-An hini brasa en ho touez a vo ho servicher.

12-Rag an neb piou bennag en em uhella a vo izelleet
hag an neb piou bennag en em izella a vo uhelleet.

3-MARK 4/ 1-10, 13-20: (krennet 4/1-9)

Alleluia Alleluia

An hadenn eo komz Doue

hag an hader eo ar Hrist

Kement hini a gavo anezañ

a jomo da viken. Alleluia !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Mark:

1-Jezuz en em lakâus adarre da gelenn war ribl ar mor;
o veza ma tiredas eur bern tud endro dezañ
e pignas Jezuz en eur vag,
da azeza enni war ar mor,
an oll a oa war an aod troet warzu ennañ;

2-Hag e kentelie anezo war galz traou dre barabolennoù.
Lavared a reas dezo en e gelennadurez:

3-"Selaouit... setu ma'z eas an hader da hada

4-Endra m'edo oh hada e gouezas greun e kostez an hent,
laboused a zeuas hag o drebas oll.

5-Goueza a reas ive lod war eun dachenn veinig,
e leh oa nebeud a gondon,
sevel a rejont buan rag n'oa ket a zonder douar.

6-Pa zavas an haol e oent skaotet,
ha dre ziouer a wrizioù e oent dizehet.

7-Lod all a gouezas e-touez ar sparn,
ar sparn a greskas hag o mougas,
frouez ebed ne daoljont.

8-Greunennou all a gouezas en douar mad,
a zavas, a greskas hag a daolas frouez,
o rei tregont evid unan, tri ugent evid unan,
kant evid unan.

9-Hag e lavare Jezuz:
"an neb e-neus diskouarn da glevoud
dezañ da glevoud."

(Amañ eh echu al lennadenn grennet)

- 10-P'en em gavas Jezuz e-unan,
ar re a oa endro dezani gand an daouzeg,
a reas goulennoù outañ diwarbenn ar barabolenn.
- 13-Hag e lavaras dezo:
"ne intentit ket ar barabolenn-se !
Penaoz neuze e komprenoh an oll barabolennou ?
- 14-An hader, ar gomz eo ar pezh a had.
- 15-Setu bremañ ar re a zo war bord an hent,
el leh m'eo hadet ar gomz;
p'o-deus klevet ar gomz, e teu raktal Satan,
hag e tenn kuit ar gomz bet hadet enno.
- 16-Evelse c'hoaz, setu ar re a zo bet hadet war an douar meinez;
ar re-ze, pa glevont ar gomz,
a ra digemer laouen dezi,
- 17-med ne reont ket a wrizioù;
tud eur mare, n'int ken !
hag e kouezont, kerkent ha ma sav trubuilh
pe heskinérez ablammour d'ar gomz.
- 18-Greunennou all a zo bet hadet e-touez ar spenn,
ar re-ze eo ar re o-deus klevet ar gomz;
- 19-Med prederioù ar bed, touellérez ar pinvidigezioù
hag ar c'hoantegezioù all en em zil enno,
hag a voug ar gomz, ha difrouez e chom.
- 20-Ha setu ar re a zo bet hadet en douar mad;
ar re-ze a glev ar gomz, a ra digemer dezi,
hag a zoug frouez, tregont evid unan,
tri ugent evid unan, kant evid unan.

3-LUKAZ. 6/ 43-45:

Alleluia Alleluia !

(Yn. 15/5)

Me oc ar winienn, c'hwi ar skourrou.

An hini a jom ennom hag a joman-me ennañ
hennet a zoug frouez eleiz. Alleluia !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz:

Jezuz a lavaras d'e ziskibien:

43-N'eus ket a wezenn vad o rei frouez fall
nag a wezenn fall o rei frouez mad.

44-Peb gwezenn a vez anavezet diouz he frouez
ne vez ket kutuillet fiez war ar spenn
na rezin war an drez.

45-An dén a denn ar mad euz teñzor mad e galon
hag an dén fall a denn ar fallentez euz e deñzor fall
rag euz ar galon eo e tarz ar homzou a zeu war ar muzellou.

AN "AVE MARIA" E BREZONEG.

(Euz ar XV^{ed} kantved d'un XX^{ed}).

E fin al levr a rent kont euz kendalh ar Werhez gloriuz Wari er Folgoad er bloave 1913 ez eus bet embannet eul labour bet savet gant an Tad BOURDOULLOUS, Jesuist, diwar-benn an "AVE MARIA", e brezoneg hag an doareou disheñvel m'eo bet embannet. Soñjet on-eus rei da anaoud al labour-se d'al lennerien.

I- 1576

Mé oz salut, Mary, leun à graez, an autrou so certain guenech. Benniguet ouch entre an holl groaguez ha Jesus an frouez ho cof so iuez benniguet. Santez Mary, mam da Doue, pedet eguidomp pechezrien. Amen.

Setu penabz eo embannet el levr katekiz kosa on-eus e brezoneg "CATECHISM HAG INSTRUCTION EGUIT AN CATHOLIQUE" Troet eo bet al levr-katekiz-se diwar katekiz latin Sant Pèr Canisius, Jesuist, gant Gilles de Kérampuil, person Kleden-Poher.

D'ar poent-se C'H a veze skrivet CH hag ar hemmadurioù (mutations) e dibenn ar gerioù ne vezent ket skrivet. Red e vo gortos an Tad Maner, tost gant vloaz diwezatah.

II- 1622

Me hoz salut Mary leun à grace, an Autrou so gueneoch, biniguet ouch entr' en oll graguez, ha beniguet an frouez hoz corff Jesus.

Santès Mary Mam da Doue, pedet evidomp ny pechezrien breman hac en heur an maro. Amen.

An droidigez-mañ a zo bennet euz "DOCTRIN AN CHRISTENIEN" savet gant an Tad LEDESMA, Jesuist, ha laket e brezoneg gant Tanguy GUEGEN. Kemeret eo bet diwar eur skouerenn kavet el Leordi Broadel e Paris (Inventor D 14604).

Hervez "BUEZ MIKAEL AN NOBLETZ", skrivet gant an Tad MANER, an AVE MARIA-se eo a implije Mikael en e visionoù.

III- 1631

(Brezoneg Bro-Wened-)

Me ou salut Mary leun à grace, hon Autrou Doue a zo gueneouh (huy a zou) benniguet entre er groague, ha beniguet eu er froueh à hou corff Jesus.

Santès Mary Mam de Doue, pedet euit omp peherion breman ha dan heur hon maru. Amen.

Diwar Ritual eskobti-Gwened.

IV-

1632

Me hô salut, leun à graç. Hon outraou a so guenech. Benniguet ouc'h antré an oll graguez. Ha benniguet eo an frouez véz ho corff Jesus.
Guerchez santel Mary Mam Doué, pedit evidomp ny pecheryen paour, brema hac en heur an maruu. Eual-se bezet graet.

Diwar "DICTIONNAIRE ET COLLOQUE FRANCAIS, BRETON ET LATIN" gand Guillaume QUICQUER, euz Rosko;

Amañ e kavom "pecherien paour" da drei "peccatoribus"; moarvad e veze lavaret "pauvres pêcheurs" e galleg. Hag evel-se eo chomet e galleg. E brezoneg ez om distroet d'eun doare tostoh d'an destenn: "pedit evidomp peherien."

V-

1658

Me ho salut Mari, leun a c'hraç, an Autrou Doue so gueneoc'h. C'huy so biniguet etre an oll groaguez, ha biniguet eo ar frouez ho coff Jesus. Santes Mari, Mam da Zoue, pidit evidomp pec'herien breman, hag en heur hor maro. Evelhen bezet gret.

VI-

1711

Me ou salut Varie leun a hracce, en autrou Doue a zo guenneoc'h, huy zo beniguet entré er grouagê ha beniguet eu er froeh à hou corf Jêsus. Santés Varie Mam da Zoué, pedet eveit omp peherion, breman ha en er hon marv. Amen.

Kavet en eur bedenn-zul embannet er bloavez 1711 "Extrait du Rituel Romain" evid Eskobti Gwened.

VII-

1776

Me ho salud Mari, leun a c'hraç, an Autrou Doue so gueneoc'h, beniguet ouc'h dreist an oll graguez ha beniguet eo ar frouez eus o corf, Jesus. Santes Mari, Mam da Zoue, pedit evidomp pec'herien, breman hag en heur hor maro. Evellen bezet great.

Tennet euz "CATEKISMOU" imprimet dre urz an Autrou illustr ha Reverand meurbed YAN-FRANCES DE LA MARCHE, eskob ha kont a Leon .P.20. Embannet e 1776.

VIII-

1943

Me ho salud, Mari, leun a c'hras, an Aotrou Doue a zo ganeoc'h, benniget oc'h dreist an holl gragez, ha benniget eo ar frouez eus ho korf, Jezuz. Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidomp, pec'herien, bremañ hag en eur eus hor maro. Evelse-bezet-graet.

Evel-se eo chomet beteg-henn.

TAOLOM EVEZ:

Hini pe hini euz al lennerien a gavo c'hoaz, marteze, troidigeziou all el levrioù koz pe er pedennou-sul. O digas deom neuze ma hellim klokaad labour an Tad BOURDOULLOUS.

(Skriva d'ar Haierou)

DANVEZ EVID PREZEGENNOU.

1) PIOU A STLAPO OUTI AR MEN KENTA ? (Ariel St Yann 8/7)Ar prizonier distroet d'ar gêr.

Emaom e fin ar brezel diweza. Du-ze, er Stalag B. ez eus eur breizad, lakom Fanch ar Veuzit kaset en tu all da harzou ar vro warlerh eur hrogad kaled. Euz bro ar Menezio Du eo ginidig. Yaouank eo ar paotr, wardro tregont vloaz kreñv ha yah hag abred e kavo e blas en eun atant nebpell diouz e stalag. Poania a ra evel ma vefe bet er ger, war e zouar dezañ e-unan, . An douar labour a zo sakr evitañ ha n'heller ket e vastari. Plijoud a ra da vestrez an tiegez, ha muioh mui dre ma tremen an amzer. An ozah a zo du-ze e Bro-Hall war an dachenn vrezel. Kelou a zeu d'ar wreg a vare da vare : "Hebdale e vo echu an draill hag e teuin d'ar gêr."- "Bez dineh a respont ar wreg. Mond a ra al labour endro, eur prizonier gall a zo bet roet deom, eur poanier eo, peb tra a zo dalhet a-ratre: ar parkeier, al loened..."

Koantig ha sichenn eo ar vaouez.

Gwech ha gwech all e-noa sentet Fanch e wad o virvillad.

Hag hi diouz he zu, heh unanig, ken goanig, a vefe bet troet,êz awalh d'en em harpa war an diaveziad-se deuet da veza evel unan euz an ti,desket gantañ ar yez, hegarad ouz an holl, dreist oll ouz an daou grouadur bianig c'hoaz.

Hir e pade ar brezel.....

Fanch a zoñje er Veuzid, eun tiig bian savet gand mein-sklent,goloet gand mein glaz. Endre dezañ er hrevier gand loened, parkeier ha lanneier... Enc edo Katell ouz e hortoz hag eur paotrig. Daou vloaz e-noa ar paotrig pa oa aet e dad d'ar brezel, stard dija war e gillorou. Kelou a zeue dezañ ivez digand e wreg,war-nez tost ar memez respont/:

"Arabad eo dit ober bilou gand al labour, an amezeien a zo mad da zikour...Hag a hend all n'eus ket a zienez evid netra: ar priziou a ya atao war gresk evid kement a zo da werza; ar paotrig a zo yah, hag a gresk heñvelloh heñvella ouz e dad, n'eus ket a zienez nemed ahanout...hir eo an disparti."

Hag e-noa bet eur foto euz ar paotrig gand e vamm, ar foto a oa laket e-kichen e wele hag eno e kave Fanch nerz kalon da jom fidel.

Er Veuzit an amezeg Yann eo a veze an aketusa da zond da zikour, atao deread ha leun a zoujañs evid ar wreg yaouank. Houmañ ivez a zave awechou gwrez en he halon hag en he gorr. Hag eun devez.... An teodou a yeas endro pa greskas an dud en tiegez, lod o louza gand binim, lod all o truezi war ar wreg hag ar prizoniad.

°
° °

Setu echu ar brezel,dond a ra d'ar ger ar brizonidi, hini hag hini.

Deuet eo tro Fañch, goude 4 bloaz harlu, echu e oa evitañ ar gwall abadenn hag e tride gand ar o joa da weled hebdale e wreg muia karet, e baotrig, e di, e zouarou, e loened, e amezeien.

Kelou a zo deuet hag an amezeien a ya d'an ti-gar tosta da ziambroug ar prizoniad.

Digouezet eo Fañch, saludi a-ra an oll, an amezeien, ar voereb koz...

- "Ha Katell ? eme Fañch, n'eo ket deuet. Petra a zo oc'hoari ganti ?

- "Chomet eo er ger, n'he deus ket gelllet dond.... nann nann, n'eo ket klañv...ouz or gortoz ema.

Fañch a ya buan e galon, ne astenn kont ebed. "Eun dra bennag a zo ?"

Hag an dud en hent...

Kont a zo ganto euz an amzer a ra, euz ar gêraouez war an traou, euz an drevajou doareet mad er parkeier dre ma'z eont. ar chatal; ar paotrig. Den de den kaoz euz Katell.

P'en em gavas el leur dirag e di e welas e wreg war en treuzou daoulinet; he fenn stouet, eur bugelig ganti etre he divreh...

Gloazet eo e galon hag e chom nehet, dilavar... endro dezañ an oll a-jom mud. Sonjal a-ra ! kaled eo bet dezañ beza dispartiet diouti epad pevar bloaz ! kaled eo bet dezi ivez moarvad gand a drubuill da gas an atant endro, he-unanig...

Hag an ozah da vond da gavoud e wreg evel Tad ar Mah Prodig, evel Doue pa bardon ne reas outi goulenn kasauz ebed, ne reas dezi rebech ebed. Ober a reas d'e wreg sevel en he zav: "Dit-te eo, emezañ ?" en eur ziskomez ar bugelig; "d'in-me e vo ivez." hag e pokas stard d'e wreg e-keit ha ma tirede an dour euz o daou-lagad dezo o-daou.

A-uz d'o fennou an êlez a gané "Peoh war an douar d'an dud a oar pardoni" dezo ivez e vo pardonet gand an Tad euz an Neñv.

Deom-ni ivez beza kannaded a beoh dre ar bed...

Piou a stlapo outi ar mên kenta ?

II) KRISTENIEN A OUENN VAD:-

AN TAD MAXIMILIAN KOLBE.

"N'eus ket brasoh karantez eged rei ar vuez evid re a garer."

(Yann 15.13)

Maximilian a oa mab d'eur guyader euz kostez LODZ er Pologn, ganet er bloaz 1894.

Mond a reas da fransiskan. Re hir e vefe konta e vuez... Eur garantez vraz e-noa evid ar Werhez Vari hag embann a reas kazetennou evid astenn an devosion eviti, koulz en e vro hag er Japon, en Indo-China, E Ceylan...

1939 ar brazel er Pologn. E miz gwengolo eo kaset da gamp Amfitz gand tadou all euz ar gouent ha roet e frankiz dezañ nebeud amzer goude.

E miz c'hwevrer 1941 eo dastumet endro hag e miz mae ema e kamp AUSCHWITZ, ouspenn eur milion a dud a gavas eno ar maro e-kreiz ar poaniou krisa. An Tad a ro nerz-kalon ha frealzidigez d'an oll endro dezañ. Med gwelom penaoz eo maro.

D'an 30 a viz gouere 1941, e tehas kuit eur prizoniad euz barakenn an Tad. Ar reolenn a oa garo !: evid eur prizoniad tehet e veze kondaonet ugent da vervel gand an naon.

Mervel gand an naon ! anken ha spont e kalon an oll. Fritsch a lavar : "Unan a zo tehet; deg ahanoh a vo buntet e prizon an naon, eur wech all e vo ugent." Hag ez euz an eil d'egile : "Ta, er mêz euz ar renk, ha te c'hoaz..." Setu kontet an deg, trouz ebed.

A greiz peb kreiz unan a lavar : "O va Doue, va gwreg, va bugale !" Kerkent... Med petra c'hoarvez ? unan euz ar brizonidi espernet a zeu er mêz euz ar renk, selled a ra ouz an alaman en e zaoulagad.

- "A-zav, eme al letanant en eur gregi en e revolver, Petra glaskit?"

Hag an Tad Kolbe - an hini oa - da lavared a vouez izel:

- "Mar plij, emezañ, va lezit da vond d'ar maro e plas unan euz ar re-ze."

Al letanant a zell outañ, sebezet, sioul e chom eur pennad.

- "Piou out ? emezañ.

- "Eur beleg katolik."

- "Piou eo an hini az-peus c'hoant kemer e blas ?

- "Hemañ, emezañ, hag e tiskouez ar paoukêz e-noa klemmet.

- "Ha perag 'ta ?

- "Ablamour, emezañ, ma'z on koz ha mad da netra; va buez n'he-deus talvoudegez ebed ken, leh e-leh hemañ e-neus wreg ha bugale."

Al letanant a jom dilavar hag a ra "ya" gand e vreh?. An Tad Maximilian a ya, e-touez an deg dibabet, e plas egile.

Ar brizonidi ne gomprenont ket ar pezh a dremen, gêr ebed... An Tad a zo evel luhed en e zaoulagad, luhed a beoh hag a levenez.

E "bunker" ar maro e veze laketa an dud kondaonet, e-noaz. Netra da zebri, tra gwasoh: netra da eva, beteg an eur ma teufe ar maro d'o delivra. Skrijuz e veze klevet youhadennou an dud toulbahet evel-se. En taol-mañ avad ez eus cheñchamant. Ar brizonidi entanet gand an Tad en o zouez ne baouezont ket da bedi ha da gana. Tamm ha tamm ez a o mouez da fall, huanadennou a glever med ket a zizesper.

D'ar 14 a viz eost, diou zizunvez goude ma oa bet stanket war an toullbah n'oa nemed an Tad hag a vefe chomet c'hoaz beo. Eur bikurenn e gasas d'ar bed all.

"N'eus ket brasoh karantez eged rei ar vuez evid ar re a garer."

Anavezet am-eus ivez an Aotrou Cloche, beleg euz eskopti Roazon, aluzenner yacuankizou ar J.A.C en e eskobti. Er brezel diweza edom tost an eil ouz egile.

Ar zoudarded a oa o kila araog an alamaned. Eur mintinvez pa zihunjont e oe gwelet : kirri-brezel e kostez eur c'hoad. Unan euz ar soudarded a oa goulennet digantan mond dre guz da daoler eur voutaillad esañs war ar harr-brezel. Dimezet e oa, eur hrouadur deaañ. An Aotrou Cloche a yeas da gavoud ar habiten: "hennez 'zo dimezet, emezañ. Me a yelo en e blas" Hag ez eas oh en em stleja e-touez ar strouez... Tostaad a ra... Sevel an e zav evid stlepel e voutaillad esañs... Siwaz ! ar vindrail-lérez he-doa labouret abretoh hag e kouzas kouezas or mignon maro.

Du-ze en eun tiig-bian, war nêziou Breiz Izel e oa eur vamm o teski d'e bianig distaga ano e dad.

A-drugare d'an Aotrou Cloche, gweled a ray e dad da fin ar brezel.

V.F

HAG E PARO AN HEOL.

Disque Résonance 22193

Stéréo- Code Y

Setu talbenn eur bladenn nevez deuet er mēz, eur pennadig-zo.

Enni e kaver daouzeg kantig nevez savet evid an amzer a vremañ, al lodenn vrasa anezo diwar bluenn Job an Irien.

An toniou anezo a zo bet ijinnet gand Mikael Skouarneg hag a zere gand dudi ouz an amzer a hirio, enno peadra da gontanti an oll, ar re goz evel ar re yaouank.

1) Ganeoh c'hwi, Jezuz.

2) Bemdez, o vale dre ar bed.

3) Peur e tewio ?

4) Sklerijenn war ar vuhez.

5) Aotrou Doue madelezuz.

6) Euz goueled an toull don.

7) Sell ouz an heol o sevel.

8) Piou 'zigoro ?

9) Torret 'vo ar sehed.

10) 'Vid klask or Zalver.


11) Du eo an nōz.

12) Eun deiz e oa.

Da heul ar bladenn e kaver ouspenn ar homzoù hag an toniou euz an oll gantikou-se hag a ra enor da Vreiz war dachenn ar han hag al lidérez.

Selaouit anezo ha sur oun n'ho pezo ket keuz.

EUN DEIZ E OA



Eun deiz e oa hag en deiz-se en he za-ouarn oe ga-net flamm, ar bed vid-om, eur bed'vit-añ, da zond gan-eom, da zond a-mañ. Dou-e an Tad a lus-kel-le Ka-vell e Vab, ka-vell an den; Pe-rag ge-lei rou-dou Je-zuz? Ganeom e kan pa z'om eürus Tal an nor gor-toz ra bem-de, ganeom e stourm pa vez ar-ne.

musique : Rikard Skouarneg
 Texte : Jo Tric'h

- 1-- Eur deiz e oa, hag en deiz-se
En he zaouarn oe ganet flamm
Ar bed 'vidom, eur bed 'vitan
Da zond ganeom, da zond amañ
Doue an Tad a luskelle
Kavell e Vab, kavell an den

Diskan

Perag gelei roudou Jezuz ?
Ganeom e kan pa z'om eürus;
Tal an nor, gortoz ra bemde
Ganeom e stourm pa vez arme

- 2... Eun deiz e oa, hag eun deiz-se
En eur hraou kloz e Bethleem
Oe ganet deom gwir Vab an den
Bugelig noas, mabig e vamm;
Doue an Tad a luskelle
Kavell e Vab, Kavell an den.

- 3- Eum deiz e oa, hag en deiz-se
Menez Kalvar a ziskoueze
An den'n oa grêt kement a vad
Hag a varve 'vidom moarvad;
Doue an Tad a zougenne
Kroaz e Vab, kroaz an den.

- 4- Ewn deiz e oa, hag en deiz-se
Ar bez serret a zigore,
Buhez nevez a ziwane
Ar garante a virville;
Doue an Tad a zispake
Splannder e Vab, splannder an den.

- 5- Eun deiz a zo, hag en deiz-se
E halv Jezuz kalon peb den
Da zigemer ha da reseo
Spered nerzuz on Doue beo;
Doue an Tad a bareo
Douar e Vab, douar an den.

Il y eut un jour et ce jour-là
De ses mains naquit tout neuf
Un monde pour nous, un monde pour lui
Pour qu'il habite avec nous, ici;
Dieu le Père souriait
Au berceau de son Fils, berceau de l'homme.

Pourquoi cacher les traces de Jésus ?
Il chante avec nous quand nous sommes heureux
Au seuil de la porte, il attend chaque jour,
Il lutte avec nous quand survient l'orage.

Il y eut un jour et ce jour-là
 Dans une étable à Bethléem
 Naquit pour nous le vrai Fils de l'homme
 Petit enfant nu dans les bras de sa mère
 Dieu le Père souriait
 Au berceau de son Fils, berceau de l'homme.

Il y eut un jour et ce jour-là
Le mont Calvaire exposait
L'homme qui avait fait tant de bien
Et qui mourait pour nous vraiment;
Dieu le Père portait
La croix de son Fils, la croix de l'homme.

Il y eut un jour et ce jour-là
Le tombeau fermé s'ouvrait,
Une vie nouvelle germait,
L'amour bouillonnait;
Dieu le Père dévoilait
La beauté de son Fils, la beauté de l'homme.

Il est un jour et c'est aujourd'hui
Où Jésus appelle le cœur de chacun
A accueillir et recevoir
L'esprit de force de notre Dieu vivant
Dieu le Père guérira
La terre de son Fils. La terre de l'homme.

AN HEOL O SEVEL.

Michel SCCUARNEC.

Paroles: Job SEITE.

Arrang.: René ABJEAN.

= 96. Tempo: marche écossaise.

1. Sell ouz an heol o se - vel, Al - le - lu - ia !
 Kae-roh e sked an drem-wel, " " " "
 2. Ra dre-ger-no an dou - ar, Al - le - lu - ia !
 Di - rag e hal-loud dis = par, " " " "
 3. Pe - gwir eo goul-lo ar bez, Al - le - lu - ia !
 E -ma ga-neom a ne - vez, " " " "

1. Ar bed hi - rio zo war hed, Al - le - lu - ia !
 2. Kaer-der ha lufr ar ste - red, " " " "
 3. Ka-nom start ol le-ve - nez, " " " "

1. Gand mall meu-li mestr ar bed, Al - le - lu - ia !
 2. N'int ne-tra e kerz e sked ; " " " "
 3. D'or Zal-ver deut e bu - hez ; " " " "